

# KIMIADOU

## EUR ZOUDART YAOUANC

*Partiet evit Madagascar*

COMPOSET ER BLAVEZ 1896

VAR AN TON A ZEZIRFET

### 1<sup>er</sup> couplet

Me zo eur soudar yaouanc o vonet d'an arme  
A meus hoant ziscleria daro demeus va bue  
Mes an amzer a vanq din ma speret zo troublet  
Mar vancan da recita me vezo excuset.

### 2<sup>e</sup> Couplet

Creno ra va isili mantret eo va halon  
Na meus quet mui eur moment a gonsolation  
Mar mizet bet ar galont eur speret cales guel  
Gant an discadurez en devoa Duhanel,

### 3<sup>e</sup> Couplet

Pe autraman ouspen eursperet da zisci  
Evelt m'en devoa bet ar prins Zingareli  
Coulou a ran eun talant velt en devoa Mozar  
Ebars en amser guechal pa va var an douar.

### 4<sup>e</sup> Couplet

Sclerigen digant Doue goudeze ar pouvoir  
Evit galout pen dre ben discleria an histoir  
Pehini zo composet bars er blaves presant  
E nor bro ni bretonet gant eur zoudart yaouanc.

### 5<sup>e</sup> Couplet

Pehini zo glaharet tont da guitat e vro  
Deut gantan va mignonet da vesca o taëlo  
Houi etrezoc'h tud yaouanc silaouit mad eta  
Gant an darn vras a hanoc'h hoarvezo memes tra.

### 6<sup>e</sup> Couplet

Evit petra discleria e vuez pen da ben  
Discleria rin seulement e amizer a anqnen  
Hini an tad ac ar vam pere a jom e guer  
Den a zo evit compren peguement in tener.

### 7<sup>e</sup> Couplet

Dre ma oa eun den contant ac ive eur pot fur  
Mar vize chomet er guer pebeus deur plujadur  
Mes an amzer a zo deut couls a vit a real  
Billet en deus recevet ret a vo partial.

### 8<sup>e</sup> Couplet

Tosteit va mignonet da glevet ar himiad  
Peguer cri an disparti deus eur vam ac eun tad  
Goude kement al a boan zeo bet deus er maga  
Breman eo ret e guitad pa zeo deut ar guella.

### 9<sup>e</sup> Couplet

Briato a ra e vam neur laret kenavo  
Comprenit eta breman peguement a zaëlo  
A zeu eus a daou lagad o vriata e buguel  
O lavaret kenavo couls a oa dezi mervel.

### 10<sup>e</sup> Couplet

Pa oan me eus da vaga emezi va buguel  
Alies meus soujet en disparti cruel  
Gant peguement a boan a meus me da zavet  
A da zilezet breman col a rin va speret.

### 11<sup>e</sup> Couplet

Pe zelin demeus da blas lec'h a vizes e noz  
En quichenic an tan a roc mont da repos  
Da vele a da zillat ac ive quement tra  
Ar pes zo bet ne servich rayo din gouela.

### 12<sup>e</sup> Couplet

Mes pa zeo ret da guitad me lar dit kenavo  
Aroc ma vi distroet matreze vin maro  
Quitad va hrouadur goude ma zeo maguet !!  
E neur laret kement man e halon zo mantret

13<sup>e</sup> Couplet

Guelet eur vam mantret ac eun tad a ouélan  
Glahar vras ezeo certen panem gonsidérان  
Briato a ra e dad o laret kenavo  
Calet es va mignonet clevet o himiadou

14<sup>e</sup> Couplet

Petra a rin me breman pa vige partiet.  
Na meus mui evit partaj mes nec'h a poan speret  
Allas va hrouadur houman zo eur glahar  
Abaoue e mon er bed na meus quet bet e far

15<sup>e</sup> Couplet

En lec'h ar joa ar blujadur oa pelzo enon ti  
Breman vont chanchet gueneomp en tourmant ac ennui  
E plas ar hanouenou e vizes o canna  
Ramlacet vont gueneomp siouas eneur ouëla

16<sup>e</sup> Couplet

Pa zeo ret dit partial kers hardi va mab ker  
En servich an nation gra ervad da zever  
A gant eur honje mad mar tristoes en dro  
Gant ar joa deus da velet a vo fin don daëlo

17<sup>e</sup> Couplet

Neuze o pedan va zud ker tachet nem gonsolet  
Va speret a zeui dar guer bep heur a bep monut  
Rac pa vezin partiet ac et er mez ar vro  
Pa zeuin da zonjal enoc'h me a scuillo doëlo

18<sup>e</sup> Couplet

Defot beza bars er guer velt dan amzer dremenet  
Evit ober ma possibl da veza o consolet  
Mes savomp on oll glemou da bete tron Doue  
Pa zeo guir a zirij tout herves e volonte

19<sup>e</sup> Couplet

Gout a ouzoc'h couls a me eo laket da ped den  
E chans var an douar iveau e blanedan  
Eun hent a zo domp trace hant Doue puissant  
Dre henes a dremenimp a pa vemp drouc contant

20<sup>e</sup> Couplet

Ar pez a lavaran deoc'h breman neur guemiadi  
Eo dont de nem gonsoli no hamzer a gosni  
A me ya a galon vad vels o peus din laret  
Gant eur guir esperans pa zout hoas do quelet.

21<sup>e</sup> Couplet

Cetu me partiet eus a dy va zud quez  
Evidomp tout va breudeur pebeus tristidiguez  
Matreze nem velfont mui biquen var an douar  
Pa zonjan en quement ze a meus poan a glahar.

22<sup>e</sup> Couplet

O va Doue puissant consolet va speret  
Da bete ty va mestrez a meus hoas da vonet  
Desir a meus d'annonces dei ar helou dinatur  
Or halonou a rano gant an displujadur.

23<sup>e</sup> Couplet

Salud de hu va mestrez rouanez va speret  
Deut ez o breman an heur da veza separet  
E trezomp ni a zo bet gont ouzoc'h va mestres  
Marvaillou consolant ac a joa aliez

24<sup>e</sup> Couplet

Breman pa zeo deut an heur vitenem separi  
Deut dre o comsou charmant un tam dam honsoli  
Rac o comsou plah yaouanc o deveuz ar pouvoir  
Da rejouissa eur galon de zeno aglahar.

25<sup>e</sup> Couplet

O consoli va mignon na rin mui davantaj  
Va speret a zo niget a colet va houraj  
A nen deus quet hoas pe zo me moa deoh prometed  
Eur garantez barfet queit a vin var ar bed.

26<sup>e</sup> Couplet

Dre ze o pedon iveau delhit ar bromessa  
N'ani poa gret dan eil zul a vis eost diveza  
Mar bezit fidel din emezi va mignon  
Ar garantez evidoc'h a zo don em halon.

27<sup>e</sup> Couplet

Va harantez va mestres na finisso biken  
Ken a vezimp separet gant Doue eternel  
Breman houlan diganec'h ken evit partia  
Eur zin deus o carantez pe merk ar bromessa.

28<sup>e</sup> Couplet

Ba zeo en honestiz n'ani a houlenet  
Birviken den yaouanc na viot refuset  
Delit va servicher kemerit va goalen  
Nac or haransez on daou e lakin da eren.

# SECREJOU AR MERC'HED

Nep a zisclerio an histoir  
E hano Corentin Bouard  
Ac en deus clevet ar Secret  
Ve avechou tre ar merc'het

Gout ouzoh ar merc'het yaouanc  
Pa zimezont a vent content  
Ac a re yaouanc goudeze  
A garfe ober evelde

## *Ar plac'h yaouanc*

Lavar din petra o peus gret  
Breman pa zoude dimezet  
Evit ma rin ive ar mot ze  
Deus a mo clevet o toare

## *Ar plae'h dimezet*

Breman pa meus me bet eur goas  
A meus gantan plujadur vrás  
Tomad a ra din ma guele  
Plujadur a meus nios a de

## *Ar plac'h yaouanc*

Ma zo kement a plujadur  
Vo ret din cavet unan sur  
Lar din da be sant nem uesta  
Vit cavet unan er bla ma

## *Ar plac'h dimezet*

Nem recommand da zant a Lard  
Henes a gredan eo o goard  
Mar po ket aroc Meurlarje  
Eur horaïs trist po er bla me

## *Ar plac'h yaouanc*

838 D

Petra o rin me hoas dar zant  
Vit cavet unan a vo coant  
Meafe sur eur présent mat  
Vit cavet eur pot delicat

## *Ar plac'h dimezet*

Plas rei dar zant particulier  
Roït dar botret leïs o guer  
Car pa ne evet eur banac'h  
Eo contant pot da gavet plac'h

## *Ar plac'h yaouanc*

Mar deo er guis se vent debauchet  
Ep eur goas ma ne chomin ket  
Ma vet quet oualh eur voutaillard  
Me peo kentoc'h eur potad

## *Ar plac'h dimezet*

Neuze e renket inoas ouspen  
Nem zerhel prop en pep tachen  
Corvet braou a liger a droad  
A beza seder o lagad

## *Ar plac'h yaouanc*

Meo remerci a dra zur  
Demeuz o oll avizou fur  
E han breman do fratica  
Hoant demezi a meus brema.

— FIN —

*Tous droits réservés.*

*GUILLERMIC.*

29<sup>e</sup> Couplet

En amzer e vec'h er servich me a vo o mestrez  
 Pa vo echu o conge hemp e prialedez  
 Partial a renket a velan den yaouanc  
 A me a joms er guer da vevi gant tourmant

30<sup>e</sup> Couplet

'Na ouefen burviken explica va glahar  
 Echu eo ma flujadur breman var douar  
 Kenavo den yaouanc pa zeo ret o quidad  
 Meur a dapad en daëlou zeui eus va daou lagad.

31<sup>e</sup> Couplet

*838 D*  
 Breman epad o konge emei va servicher  
 Da hep eun nomb amzer houi scrivo din lizer  
 Partiet a galon vad emezi den yaouanc  
 Gras deh de nem gontanti bepret no regimant

32<sup>e</sup> Couplet

Arsa va mestrezic desir a meus brema  
 Da ret dec'h eur souvenir quen evit partia  
 Cetu aman eur mouchouar gant va daëlou trempt  
 Ac a zeziran rei dec'h m'o ped ent kemeret.

33<sup>e</sup> Couplet

Evit na zeufet da zonjal pa vin em regimant  
 Er boan zo eus o quidad va mestrezic yaouanc  
 Partial a renken lavaret kenavo  
 A bezit fidel dinme dalhit mad do comzo.

34<sup>e</sup> Couplet

Neuze deus ty ma mestres me ya a galon vad  
 Betec ma oan nem gavet bars e kichen eur hoad  
 Enem gavet eno me arretas em za  
 Da zonjal bars em mestres ma gomançis goue la.

35<sup>e</sup> Couplet

Coajou bras ac eureus me meus da dremenet  
 Alies o hont da velt va guir vuyat caret  
 E han breman da zisheoli didan darn eus da vrançou  
 A da gonto va doare da lod eus da zeillou.

36<sup>e</sup> Couplet

Ne doun mui evit comto breman dam guir westrez  
 Va halon e zo mantret gant au dristidiguez  
 Prostern a ran dan daoulin didan brancou ar gue  
 Evit goulens azistans digant ar guir Doue.

37<sup>e</sup> Couplet

Va speret a zo savet tre da betec e dron  
 Da houl evidomp on daou e venediction  
 Ouspen a meus goulet dre ma ze puissant  
 Bars en plas diou galon drist da lacat diou gontant.

38<sup>e</sup> Couplet

Gout a ouzon va mestres e deveuz calonad  
 Va bunan a meus iveau pa zeo ret e huitad  
 Deus a noz ac ar nintin aliez var an de  
 Teui nor memoir da zonjal a neil ene guile

39<sup>e</sup> Couplet

Rac diou galon unanet dre garantez barfet  
 A ra cales poan ganto pa vent dispartiet  
 Pa oan me e creis ar hoad akedet o ouëla  
 Me a glevey eun eonic uz va fen o cana.

40<sup>e</sup> Couplet

Mel o sevel va daou lagat da zelet eus an eonic  
 Estonet enz e glevet o cana magnific  
 Neur adres dezan comzou easi evelt deun den  
 Gant eur galon mantret a carguet a anquen

41<sup>e</sup> Couplet

Arsa ta eonic binn me no hont dans arme  
 O pedi ran da anone breman dam harante  
 Eur helou consolant a meurbed favorab  
 Vit ma zizeho an dour demense daou lagat.

42<sup>e</sup> Couplet

Pa vin erru en arme me a rimo eur zon  
 A matreze kement ze a rei joa de halon  
 Me zigaso eur hopi dar guer dam mestres coant  
 Enn al a salhin guenen bepred er regimant

43<sup>e</sup> Couplet

Gout hano ar homposer matreze a zeziret  
 Corentin or Bouard dre oll ezeo hanvet  
 Pen devoa e homposet e oa en Algeri  
 Neur guer a zo en Afrik ac e hano Bougi

44<sup>e</sup> Couplet

Breman en illis ven a ra zemeuranc  
 Ebars en Bannalec neur hornic deus ar Franc  
 Eno ema breman sambles gant bried  
 Grac dezo de nem garet keit a vont var ar bed.